

# AN HOLLAIKA

Kanaouenn ar vesaerien e Kerne; hanvet eo an hollaïka dre m'ema ar c'hiz gand ar re a stag gand ar c'hanze da lezel alies, a bouez penn, ar youc'hadenn : Hollaïka, hollaïka !

The musical score consists of ten staves of music in common time, treble clef, and a key signature of one sharp. The lyrics are written in Breton, corresponding to the musical phrases. The lyrics are:

Di. sul vintin dal ma sa-vio  
Da vont gant va saout er maez me gleveva  
dous o ka-na a-nat mat oa diouz he  
mouez me gle-ve va dous o ka-na  
Ka-na ge-war ar me-nez ha me mont da  
ze-vel eur zon da ga-na gan-ti i-vez

HEN

Disul vintin, aba savis da vont gant va saout er maez,  
Me ' gleve va dous o kana, anat mat oa diouz he mouez;  
Me ' gleve va dous o kana, kana ge war ar menez,  
ha me ' mont da zevel eur zon da gana ganti iveau.

Ar genta gwech ma 'm eus gwelet Marc'haridig, va mestrez,  
oa oc'h ober he fask kenta e-barz iliz va farrez,  
E kreiz tre, barz iliz Fouesnant edo gand ar vugale,  
D'ar pred-se he doa daouzek vloaz ha me daouzek vloaz  
[ive.]

Evel bleun melen ar balan, pe 'vel ar rozennig c'houez,  
'Vel ar rozenn c'houez ' kreiz al lann, oa etrezo va mestrez.  
Tra m'oa padet an oferenn, met sellet outi ne raen,  
Ha seul-vui ma sellen outi ha seul vuioch he c'harien.

Me 'm eus eur wezenn em liorz 'zo karget a avalou,  
Hag eun dachennig c'hlas dindan ha tro-war-dro boden-  
[nou,  
Pa deuio va dousik koantik, va muia karet d'am zi,  
Ni a yelo da zisheolia, va dous ha nte dindanni.

An aval rusa a dapin hag eur boked 'rin 'viti,  
Hag eur rozinil a garan a lakin iveau d'ezi  
Eur rozinilig gwall wenvet, abalamour d'am enkrez  
rak n'm eus ket bet c'hoaz diganti eur pok a wir garantez.

HI

Tavit, gant ho son, va mignon, tavit prim gant ho komzou,  
An dud o vont d'an oferenn 'zo en traon ouz hor selaou,  
Eur wech all pa zeuimp d'al lann, pa vimp hon unan hon  
[daou  
Eur pokig a wir garantez 'roïn d'eoc'h, unan pe zaou!

BARZAZ BREIZ.

